

402

Prosper.

(243, suite)

Var ton : Brava penno'hic so er vro.

Beza so ebars ar guzer - mâ
 Un den eus ar maleurussa ;
 Hed seiz leo tro gement ve grêt
 Oll ezint dezjan tamallet ;
 Na zeus get, var a leverer,
 Falloc'h hailloñ equet Prosper ?

Mar gueler ur c'hoef chiffonet,
 Pe un davancher difrezet ;
 Mar bez flastret ur bern colo,
 Mar diflich un del dishano,
 Gergent e lavar ur gomer :
 Piou a so cauz, nemet Prosper ?

Mar bez laqet lec'h ur bod mae, (244)
 Ur vojen spenn pe un troad loüe ;
 Mar deo fuloret ar person,
 Mar deo moredu e zgermon,
 E lavaro seurezet kaer :
 Piou a so cauz, nemet Prosper ?

Ma n'er get nemeur da gôves,
 Na d'an ofern gen alies ;
 Mar flich d'ar bautret mont d'eva,
 Mar dichanç d'ar merc'het riscla,
 Da Basq, mar bez calz tapet ber :
 Piou a so cauz, nemet Prosper ?

M'o deus meur a varn nec'hamant
 Abalamour d'ar merc'hed coant,
 Mar golo nê gant e asqel,

Vel ar yar, pa deu ar sparfel
 Da nijal huz e c'hlodat qer : (245)
 Piou a zo cauz, nemet Prosper ?

Mar queler meur a blac'h gentil
 Vit e voad eun tam re habil,
 Contraign, dre ar c'irconstançon
 Da gresqi banden e broziou,
 Ha da hasten e davancher :
 Piou a zo cauz, nemet Prosper ?

Mar dichanç da veur a basour - qez,
 Tentet gant ar briedelez,
 Cavet nos genta e heuret
 Digoret franc dor ar gaonet,
 Hac eat al lapous gant al laer :
 Piou a zo cauz, nemet Prosper ?

Mar gra an ezac'h buez fall,
 Mar leger gerniel var o zâl,
 Mar nen dint get tad da vugale (246)
 Pere a vagont gourcoude ;
 Mar deus calz a zoug boutou bër :
 Piou a zo cauz, nemet Prosper ?

Mar queler merc'het ha pautret
 Evel diaoulou dichadennet
 O tîredec d'an ebatou,
 Pa glêvont mouez ar binisou ;
 Mar queont en pao Lucifer :
 Piou a so cauz, nemet Prosper ?

403

Merc'het, mar qerit va c'hredi,
 Pa chanço d'êc'h mont en un ti,
 Mar bez eno ar c'hliant-se,
 Discampit buan ac'hane:
 Noc'h james en brassoc'h danger
 Eguet pazoc'h tost da Prosper.

(247)

En eur quir, an oll doliou caer
 A ve taulet var choug Prosper,
 Mar be quelet aben cant vloa
 An antechrist o tispara,
 Ractal me so sur e crifer:
 Ressuscitet erzeo Prosper.

(Prosper Prout.)
 [sic.]

(Vol. IV, p. 243-247.)
 11 str. numérotées.

cf. Prosper Prout, Kanaouennou gret
 gant eur C'hernewod, p. 21-23: An den
 samet pouner.